



AN DARVOUD

«Edomp hon-daou, va gwreg ha me, o tont en-dro eus Kurnig e parrez Ploesezni. War-dro hanternoz 'oa. O tebrñ koan e oamp bet e ti ur mignon deomp. Edomp o pignat gant kreac'h ar Vougeo hag a zo serzh-mat. E Lanriwanon e oamp en em gavet, a-raok kroashent al Leuzre, ken hon doa gwelet ur vandennad voc'h e-kreiz an hent bras. Moc'h doñv e oant. N'ouzon dare pet kant a oa anezho!»

«Edon o vont da neuñv, gant va marc'h-houarn, da aod ar Vougeo. Da hanternoz edo ar mor tost d'an darze. D'ar poent-se eo e plij din neuñv, den ebet war-dro. Da viz Gwengolo e vez klouar ar mor atav. Tommoc'h eget e-kreiz an hañv zoken. Erruet e oan e-kreiz an diskenn, en tu all d'al Leuzre. Ha setu me paket trumm e-kreiz ar moc'h. Ur mor a voc'h!»

Bez' edo an enseller-polis Sezni Gwegen o lenn ar c'hazetennoù e ti an archerien, e parrez Ploudiner. D'al Lun 22 a viz Gwengolo 'oa, da nav eur vintin.



«D’ar Sadorn 20 a viz Gwengolo, war-dro hanternoz, ez eus bet kavet ouzhpenn daou c’hant gwiz o c’haloupat war an hent bras etre kroashent al Leuzre, hanter-hent etre parrez Plougadvan ha parrez Ploesezni, hag aod ar Vougeo. Diouzh doare e oant deuet er-maez eus ur c’hraou-moc’h bras. Meur a zek pemoc’h all, re vras ha re vihan, a zo bet kavet beuzet en ur pezh poull-hañvouez. D’an aotrou Pêr Ogorig eo an tiegezh, ouzhpenn mil pemoc’h ennañ. O vakañsiñ emañ ar perc’henn e Bro-Dunizia asambles gant e wreg. Galvet int bet da zont en-dro d’ar gêr. O mab Alan, ur paotr yaouank 22 vloaz, a oa o terc’hel ar stal. O bugel nemetañ eo, studier war al labour-douar e kêr Añjev. N’eus kavet roud ebet anezhañ war-lerc’h an darvoud.»

– Ma, biskoazh kemend-all ! eme an enseller, en ur sevel e selloù diwar ar gazetenn. Na pebezh abadenn !

En derc’hent, d’ar Sul war-dro teir eur goude lein, e oa en em gavet e Ploudiner, evit kas an enklask en-dro. Daou archer a oa bet fiziet ennañ gant komiser bras Brest, Yann Saout, war-dro 45 bloaz dezhañ, ur gwaz krenn, lart a-walc’h ha laouen atav, ha Jos Merdy, tregont vloaz dezhañ, ur paotr bras, ledan e zivskoaz. Maiwenn Richard, un archerez yaouank ugent vloaz, ’oa da zont diouzh ar mintin. O studial e oa-hi e skol ar polis skiantel. «Ur skipailh a bevar den gouest, alato ! a soñjas

Sezni Gwegen. Ne vezo dale ebet ganeomp evit direstiñ ar gudenn. »

Kerkent ha lakaet e zilhag hag e draoù all er gambr a oa bet kempennet evitañ en archerdi e oa aet Sezni Gwegen, gant Yann Saout ha Jos Merdy, d'ober ur sell ouzh an tiegezh bras e Lanriwanon. Ur pezh mell atant, gant belkadoù krevier hir ha ledan, laboù ha grañjoù, sanailhoù uhel evit ar boued, pikolioù poullou-hañvouez. Ur gwir labouradeg. Ur maread tud a oa o kempenn an traoù, kerent, amezeien, mignoned, paotred ha merc'hed-an-tan... Gant ur breur da Bêr Ogorig, kouer er penn all d'ar barrez, e voe diskouezet an traoù da Sezni Gwegen. Un ti nevez a oa bet savet e-kichen an ti kozh, deuet da vezañ grañj. Ur mellad ti kaer, mein-benerezh oc'h ober anezhañ, toet gant mein-glas tev. Mont a rejont o-daou en ti, en urzh 'oa pep tra, na dor na prenestr torr ebet. Dont a rafe an enseller en-dro ennañ a-benn ma vefe distro an ozhac'h hag e wreg d'ar gêr. Bez' edo karr an tad hag hini ar vamm er c'harrdi, daou garr bras ha lufus. Strakell ar mab Alan a oa er-maez, en ur c'horn eus al leur.

Goude bezañ roet o labour d'ober d'an daou archer e oa aet Sezni Gwegen da gavout an testoù kentañ.



D'AR SUL 21 A VIZ GWENGOLO

D'AN ABARDAEZ

Kentañ test en doa kavet Sezni Gwegen d'ar Sul d'abardaez a oa Erwan, ar paotr yaouank a oa o vont da neuñv d'ar Vougeo pa oa en em gavet, war-dro hanternoz, e-kreiz ur «mor a voc'h». O klask ar moc'h dianket war ar maez edo, asambles gant peizanted ha paotred-an-tan. Ur paotr bras a 25 bloaz a oa anezhañ, un duard a zen, teñval e groc'hen, kustum da vevañ dindan an heol. Ur paotr kreñv troet gant ar sportoù. Poltrejer e oa diouzh e vicher evit kelaouennoù o tennañ d'ar mor, d'an natur, d'ar plankennoù-dre-lien ha d'ar splujerien. Dre ar bed-holl e laboure. Da viz Gwengolo e teue da dremen ur pemzektez bennak da di e vamm, intañvez anezhi, hag a oa o chom etre Leuzre ha Brouaneg Kozh. E dad-kozh, ar Moud a veze graet anezhañ, a oa bet trafiker-moc'h gwechall.

– Ur vicher bet krouet etre an daou vrezel. Abred diouzh ar mintin ez ae Tad-kozh d'ar foarioù pell da brenañ moc'h bihan. Sevel ha lardañ anezho a rae er gêr, en ur c'hraou, ha mont da werzhañ anezho d'ar foarioù, adarre. Keroc'h evel-just!



Meur a drafiker-moc'h a oa bet savet pinvidik diwar ar vicher-se. Lakaet o doa sevel tiez bras, meinadurezh en-dro d'an dorioù ha d'ar prenester, kemeret mevel da sikour an ozhac'h war-dro ar moc'h, ha plac'h d'ober al labour en ti. Aour a oa ouzh lostoù ar moc'h d'ar poent-se ! Meur a drafiker a oa bet kouezhet diouzh lost ar c'harr da c'houde-se, se !

- Anaout mat a raec'h Alan ?
- Hag e raen. Un tammig yaouankoc'h egedon eo. Alies en em gavemp en aod da c'hoari, da neuñv.
- Ha nevez zo ?
- Ne oamp ket ken bras mignoned ken. Alies e veze cheu ganeomp abalamour d'ar glandour.
- Ar glandour ?
- Ar « bezhin glas » ma keroc'h, ken stank en aod en dervezh hiriv, abalamour da staot ha da gaoc'h ar moc'h.
- Ha mont betek en em gannañ ?
- Ket, alato ! Gant e dad avat on bet o c'houren. Alan en doa muioc'h a skiant. Kompren a rae an traoù.
- Peg eit zo n'ho peus ket gwelet anezhañ ?
- Er bloaz-mañ ne'm eus ket gwelet anezhañ c'hoazh. Edon just oc'h en em gavout er gêr pa oa deuet ar moc'h er-maez eus ar c'hraou. An dro gentañ 'oa din da vont d'an aod, er Vougeo yantao, er bloaz-mañ.

Goude-se e oa bet an enseller o kaout ar c'houblad a oa bet

test ivez d'ar Sadorn noz. Sis Talogig, ur paotr 60 vloaz, ha Marianna, e wreg, a oad dezhañ. E Lilitia edont o chom, er penn all da Blougadvan. E ti Kou an Dall, ur c'helenner hanter-kant vloaz, e oant bet gant o c'hoan en nozvezh-se. Mignoned a-gozh e oant. A-unan o doa bet stourmet, tro ar bloavezhioù 1970, a-enep ur greizenn nukleel a oa da vezañ savet war an aod e Kurnig. D'ar mare-se e oa meur a raktres, Gwimaeg e Bro-Dreger, Plonger e Goueled-Leon, an Ardeven e Bro-Wened, ha Plougoñv diwezhatoc'h. War o leve e oa Sis hag e wreg, bet o labourat e porzh Brest e-pad o buhez. Bremañ, war-lerc'h an nukleel, edont o stourm a-enep an ormel. Goulennet e oa bet gant ar stal *Ormeliz* eus Lilitia gellout sevel ormel e kaouedoù e pleg-mor ar Vougeo. Freuz bras a oa er vro. An holl gwitibunan e Ploesezni a oa savet a-enep ur seurt embregerezh. Louzet e vefe ar mor hag an aod, gant kaoc'h ha staot an ormel, ha difenn ouzh an dud mont d'al lec'h ma karfent, war-neuñv, ha gant o bagoù hag o flankennoù-dre-lien.

– Anaout mat a raemp Alan, sur. Da bep bodadeg diwar-benn an ormel e teue da lakaat freuz. A-du-krenn 'oa gant *Ormeliz* Lilitia. C'hoant en doa lakaat krouiñ ur c'hop e Kurnig ivez, evit sevel ormel. Evit reiñ labour ha bara d'an dud, war e veno.


– Ha petra a leverec'h-c'hwi?

– «N'eo ket a-walc'h deoc'h peizanted louzañ an dour-eien gant ar staot moc'h!» a lavaremp-ni dezhañ. An dour-mor

ivez a fell deoc'h loudourañ gant ar c'haoc'h ormel». Sed aze ar pezh a lavaremp dezhañ.

- Kannoù 'veze?
- Tost! Paganiz eo tomm o gwad.
- 'Poa ket gwelet Alan en nozvezh-se?
- Tra! Pell zo n'hon eus ket gwelet anezhañ.

Poan-benn en doa paket Sezni Gwegen oc'h ober e dro d'ar Sul d'abardaez. C'hwezh an hañvouez, c'hwezh ar mor, c'hwezh ar bezhin. Kousket fall en doa graet da Sul da noz. Ar moc'h hag an ormel o troidellat en e benn.





D'AL LUN 22 A VIZ GWENGOLO

KREISTEIZ NEMET KARD

Anaout mat a rae Sezni Gwegen ar vro. E Plouelouan e oa ganet, etre Treiz-Sezni ha Beg-ar-C'hastell, war ribl ar stêr Pillimadeg. Ne oa ket chomet gwall bell er vro. E skol laik an Treaz e oa bet betek e unnek vloaz, goude-se e oa aet d'ar skolaj da Vrest – e dud a oa eno o chom a-benn neuze – a-raok mont da Bariz, evit e studioù polis. Distreiñ d'e vro a rae, endra ma oa studier, evit tremen ur pennad hañv e ti e dud-kozh, aoherien anezho.

Pemp bloaz warn-ugent 'oa e oa bet deuet en-dro d'ar vro, war e vicher neuze. Evit enklask da geñver brezel ar rigadell. Bec'h bras a oa savet e Lilitia, etre ar saverien rigadelled ha difennerien an endro. Paotred ar rigadell, pesketaerien ha bezhinaerien anezho, o doa krouet ur c'hop evit gellout sevel kregin en aod, etre Enez-Treiz ha Roc'h-Gored. Difennerien an endro, kalz a vartoloded war o leve en o zouez, o doa savet ur strollad difenn evit enebiñ outo. War o meno e vefe louzet ar mor hag an aochoù gant ar c'haoc'h kregin, ha miret ouzh an dud da vont d'al lec'h

ma karfent. Tra an holl 'oa an aod. A-viskoazh e oa bet evel-se. Dleet 'oa e chomfe da viken evel-se. C'hwezhet e oa bet tan en ur voest-noz, war devenn ar Vougeo, end-eeun, ha drouklazhet un den e Lilitia ha sanket e gorf en traezh dindan un daol-vaen, a veze goloet gant ar mor da bep mare.

«Memes stourm hag hini ar Vougeo, en dervezh hiriv!» eme an enseller outañ e-unan. Tennañ gownid ha pinvidigezh eus ar mor, pe lezel frank an aod d'an holl. Unan a zaou. Stourm kouerien gentañ an Neolitik ouzh chaseourien ziwezhañ ar Mezolitik!

Pemp bloaz warn-ugent! Un tamm mat a oad abaoe. D'ar mare-hont e oa anezhañ un den krenn a zaou-ugent vloaz, ledan e zivskoaz, start war e gilhorou, uhel e dal, berr e vlev, moan e fri, kiget-mat e vuzelloù, sonn e elgezh. E-giz an dud all e oa aet war an oad, anat 'oa. Lartaet un tamm bennak, tortet e gein ha displuet kern e benn. Nerzh ha youl a ziskoueze e zremm atav, ken lemm all 'oa e zaoulagad dalc'hmat. N'oa ket gwellaet da gaozeal abaoe 25 bloaz. Ken penn-maout all 'oa atav. E gozh vantell rous a veze bemdez gantañ war e gein. Entremar e oa bet, meur a dro, da lakaat kab-aod e dad-kozh. N'en doa ket kredet ober dirak e genseurted. Petra o defe lavaret! «Paotred Breiz Atao!» Dizale,

a-benn bloaz moarvat, edo da vont war e leve. Houmañ 'oa unan eus e enklaskoù diwezhañ, douetus. Prenet en doa ti e dud-kozh e Plouelouan. Di e teufe da chom.

«Ar moc'h adarre!» E miz Eost e oa bet Sezni Gwegen oc'h ensellout e Bro-Dreger. Un toullad moc'h-gouez a oa bet kavet er Stêr-Drev, mouget e-touez ar bezhin brein. Tamallet e oa bet an nitriti, degaset gant an dour-hañvouez, da vezañ lazhet ar perc'hell. Pe an aezhenn gontammus o sevel diwar ar bezhin glas. Lazhet moc'h-gouez gant moc'h-doñv! Amañ e Lanriwanon e oa aet ar moc'h-doñv da ouez!

– Ha neuze, paotred, hag a nevez?

Erruet e oa Yann Saout ha Jos Merdy, e zaou archer skoazeller, bet o troial abaoe ar mintin.

– Netra nevez ganeomp! eme Yann, en ur lakaat e zaouarn war e gof ha mousc'hoarzhin.

– Nag a boan o pakañ ar moc'h en-dro! a gendalc'has Jos. Ne ouezomp ket pet a zo anezho, etre ar re a zo bet paket, ar re veuzet hag ar re a zo o redek atav.

– 'Peus ket goulennet digant Pêr Ogorig?

– Eo alato! Galvet hon eus anezhañ. Ne oa ket sur pet pemoc'h a oa.

– Gouzout a rit, Aotrou enseller, eme Yann, ar beizanted ne lavaront ket ar wirionez atav!